


# A R - V R A N

HAC

# A L L O U A R N



Eun devez mestrez Brân , clujet var eur vezen ,  
A zalc'he en he beg eur pez patatezen ;  
Alanic al Louarn , ar c'hoez mad pa zantas ,  
Eguis eur c'hànjoler dezi a lavaras ,  
Var ton tra la la-la-la , var ton tra la la-la-la ,  
Var ton tra la deri dera la-la-la.

— Bonjour dèc'h , itron Brân : penos a reomp-ni ?  
— Eleal , mestr Louarn , brao avoalc'h oun. Na c'houi ?  
Va bugale ive , sepet an diveza ,  
A zo gant ar c'hoeluch pemzec dez zo dija ,  
Var ton tra la la-la-la , var ton tra la la-la-la ,  
Var ton tra la deri dera la-la-la.

— O Brân ! peguer caer oc'h gant ho robe hep pris !  
C'houi oc'h eus sur laqet e ober en Paris ?  
— Ia , eme ar Vrân , carguet a fouguerez :  
Hac e ro da anaont ty he c'hemenerez ,  
Var ton tra la la-la-la , var ton tra la la-la-la ,  
Var ton tra la deri dera la-la-la.

— A feiz ! mar deo ho mouez hanval ouz ho tillad ,  
C'houi a die anfonci an oll gaoerien vad.  
Grit din eta clévet ho mouez qer magnific ;  
Rac ebars ho famill' voar crén var ar music ,  
Var ton tra la la-la-la , var ton tra la la-la-la ,  
Var ton tra la deri dera la-la-la.

Qerqent an itron Brân , hep beza re bedet ,  
A c'hrosmol dre he fri *An Tour dantelezet* ; (\*)  
Mes dre ma ranq he beg digueri da gana ,  
Ar batatezen zo lèzet prest da goeza ,  
Var ton tra la la-la-la , var ton tra la la-la-la ,  
Var ton tra la deri dera la-la-la.

Ractal mestr Alanic , a gonte mad var ze ,  
Var ar batatezen a zaill diouc'h-tu neuze.  
Evel eun tord e c'hoarz , an tam mastin fripon ,  
En eur frota e gôf , ha joaüs e galon ,  
Var ton tra la la-la-la , var ton tra la la-la-la ,  
Var ton tra la deri dera la-la-la.

Tréi a ra ouz ar Vrân , hac e lavaras deï ,  
O tont d'e c'haqetal hac ober goab anèi :  
Me meus ho trappet brao ! Vil e zeo ho tillad :  
Ne ouzoc'h qet cana..... Ho patatez zo mad ,  
Var ton tra la la-la-la , var ton tra la la-la-la ,  
Var ton tra la deri dera la-la-la.

O clévet an dra-ze , ar Vrân maleüruzez  
A zo despitet oll , confrontet gant ar vez.

---

(\*) *Chanson all*, composet gant A. LÉDAN.

Oh ! perac e teuer an duel da zifen !  
M'em bize da lazet gant eun tenn pistolen ,  
Var ton tra la la-la-la , var ton tra la la-la-la ,  
Var ton tra la deri dera la-la-la.

An oll lapousset all , o clévet comz ouzin ,  
A deuyo d'am goapât bremâ dindan va min....  
Me , mestrez ar Brini ! trappet gant Alanic ,  
A vo sellet bremâ' vel eul Laouenanic !  
Var ton tra la la-la-la , var ton tra la la-la-la ,  
Var ton tra la deri dera la-la-la.

Clévit ar voralen eus ar c'houplejou-mâ ;  
Brini , bras ha bian , va zelaonit amâ :  
Pa vo leun ho qinou demeus a batatez ,  
Serrit ervad ho peg , ha grit tevel ho mouez ,  
Var ton tra la la-la-la , var ton tra la la-la-la ,  
Var ton tra la deri dera la-la-la.

7<sup>e</sup> Gûengolo 1848.

A. LÉDAN.



---

E Montroulez , eus a Imprimeri LÉDAN.